



## Ar Flammeg hag an Tousegi

Fichenn savet gant Silvenn Koant



### Pal ar c'hoari :

- Ar flammeg a glask tapout an tousegi
- An tousegi a glask chom an hirañ posupl heb bezañ tapet

*etre 5 ha 15 c'hoarier a ranker kaout*

### Ezhomm e vez

- Un dachenn brasik a-walc'h, forzh peseurt stumm dezhi a dalvezo da lagenn
- Ur plasig e-kreiz an dachenn a dalvezo da enezenn

*NB : Al lagenn hag an enez a rank bezañ bevennet sklaer o harzoù.*

### Penaos e vez c'hoariet

El lagenn emañ ar flammeg roz hag an tousegi.

War unan eus e dreid e vez ar flammeg hag e ya war-raok war e droadik-kamm.

An tousegi, hualet o zreid ganto, a ya war-raok en ur lammat.

Klask a ra ar flammeg tapout an tousegi. Kerkent ha ma vez touchet gant ar flammeg e teu an touseg da vezañ flammeg d'e dro. Klask a ra tapout an tousegi all ivez.

An tousegi a c'hell mont da ziskuizhañ war an enez : ne c'heller ket o zagañ eno.

*NB : Kuit da lazhañ ar c'hoari e vez gwelloc'h lakaat un termen d'an tousegi da chom war an enez (etre 3/5 mm da skouer)*

- Mont a ra ar maout gant an touseg bev diwezhañ.

### Doare all

Gallout a reer skarzhañ an tousegi bet tapet.

*Hiroc'h e vez ar c'hoari ha skuizhusoc'h e vez evit ar flammeg.*